

KIS-670 – Pegoulz dalc'hoù labour digor ?

(LM da GE – 11 02 00)

Dizañjer eo ar brezhonegoù bet evit ar Stad hag ar re-mañ eo a fell dezhi kas war-raok : ar gwrizioù (hag evit lod seul bloukoc'h seul welloc'h). Kaout gwrizioù zo ret nemet en em gav an den evel ur penn peul (gwriziennet, a !) ma ne daol skourrou. Gwel ar skourrou-se eo a laka ar Stad da vont a-c'hin :

- ar skolioù brezhonek o kreskiñ,
- ar mediaoù war ziorren,
- an embann o pakañ yec'hed
- hag (last but not least) ar brezhoneg arnevez oc'h emledañ
goustad

eo ar re-mañ kent.

Ho trugarekaat a ran, c'hwi hag ar re a labour en-dro deoc'h, evit ar pezh a rit evit pourchas dimp, paourkeizh yezherien... deboner ma 'z omp, ar gerioù hon eus ezhomm evit ren hor buhez en ur yezh n' he deus ket mezh da haeriñ ar pezh ez eo.

Padal (triñchin war-lerc'h pour) perak oc'h chomet keit all hep klask stummañ tud ? Abaoe un nebeud bloavezhioù e lennan *Lavar* hag anzav a ran em eus kiet evit kompren (na pet gwezh on chomet bout) dre ziouer ur benveg d' am skoazellañ : nag un aezamant *Lavar 12* hag e c'herva ! Pegoulz dalc'hoù labour digor frank (BAYA n' em boa morse klevet anv anezhañ a-raok lenn *Lavar 10* ?) ma c'hellot displegañ da skouer talvoudegezh an elfennoù (rakgerioù, h.a.) advevaet ganeoc'h da luniañ gerioù nevez ? An arverer boutin n' en deus ket amzer da vont e strouezh puilh (ha deurus meurbet) hoc'h embannadurioù da glask an ditouroù en deus ezhomm war an tomm ; ul levrig alc'hwez a c'hellfe bastañ d'an ezhommou "pemdeziek".

Grevusoc'h eo ar blegenn fall m'emañ ar brezhoneg er skolioù, e *Diwan* da nebeutañ. An dizurzh vrasañ zo lakaet da reolenn ken en em gav ar skolidi o "wiskañ" yezh komzet (ha re alies skrivet) an harlikin pa rankont kemm teodyezh da heul ur c'hemm skolaer. Ken en em gavont kollet e geun al liesdistagadurioù. "Breudoù meur ar Brezhoneg" a vefe poent bras aozañ ma ne fell ket dimp mont a-benn er c'hleuz

d' am meno : pezh brezhoneg (ha neuze pezh brezhoneg er skolioù), evit pezh ezhomm, evit pezh kevredigezh ha neuze pezh staelad ? Embann a reomp hor c'hoant da welet ar brezhoneg lakaet da yezh kefridiel. OK, gant ma ve dilezet buan gwengel ar yezh pobl : hini ebet eus yezhoù kefridiel ar bed n' eo chomet en he stad yezh pobl.

Un dra all. Ar skolaerien a blijfe dezho ober penn-da-benn gant ar yezh arnevez en em gav a-dal d'ur gwall gudenn ma ne sko ket an holl war an hevelep tach : daoust hag e c'hell ar vugale bezañ gouestlidi etre daouarn skolaerion dalc'hidi ar yezh pobl pe ar yezh arnevez a bep eil ? Bez' o deus ezhomm ar skolidi ur reolenn. Daoust ha ne vo ket tu da sevel ur rouedad skolaerien a ra gant ar yezh arnevez ?

(GE da LM – 15 02 00)

Vad a ra dimp ho prizadurioù ha muioc'h c'hoazh pezh a ginnigit evel triñchin : setu an trede gwech e tri devezh ma klevan an hetadenn ma ve aozet “dalc'hioù labour digor”.

Evel a ouzoc'h e voe graet un arnod gant Herve KERRAIN etre Ebrel 91 ha Here 92 : ur wech ar miz ez emvode un nebeut keneiled dezhañ ha tud eus *Preder*, met e diouer amkanioù boutin ne zeujomp ket a-benn da ren ur c'henlabour gwirion. Tud *Preder* a veze ken sipet da ren o imboure'hioù ma ne droent ket a-walc'h o evezh war-du o c'henvodadourion hag ar re-mañ ne hañvale ket bezañ sklaer ganto o unan perak e oant eno. Studi a raemp an doareoù da lakaat e brezhoneg termenoù kalvezel (degaset peurliesañ gant Herve a oa o plediñ gant an Diougonerezh), met un dislank a zeuas buan war wel etre an dud o doa graet o micher eus ar sevel gerioù abaoe tregont ha pergont vloaz hag an dud o doa pep tra da zeskiñ war ar vicher-se. Ar rebech d'ober din en degouezh eo n'on ket bet diougoner : kentañ tra, a-raok ober va numero yezhour, a vije bet mont da bep hini eus ar berzhiaded war-benn gouzout perak e oa deuet, petra a c'hortoze, e pe boent e oa eus e stummadur... Fazioù moarvat a zleor diwall diouto mar bez aozet a-nevez devezhioù studi eus ar seurt.

Un diouer heñvel a ziougonerezh a damallit dimp en hon embannadurioù, gant gwir abeg moarvat. Da emzifenn e c'hallfemp tennañ arguzenn eus hon niver bihan, eus an hent ramzel a chom d'ober. Donoc'h eo koulskoude hon abeg da vezañ chomet en distro. Hemañ eo : n'eo ket a-walc'h dimp ober ar pezh a reomp, ni venn gouzout perak en greomp, pe ster en deus. Ken abred ha 1960 hon eus argerzhet en doare-se : merkañ ur pal d'ar *bount* mut a vuhezomp, dezrannañ hon ober e-keñver ar pal, dezrannañ ar pal e-keñver ar *bount*, klask ober meiz war ar *bount* ; da heul nevezñ

dremm ar pal, adsavlec'hiañ hon ober, donaat reiz ar *bount*, h.a. E se, eus 1962 da 1977 e kemeremp ar Stad vrezhon da bal ha dre SADED, ESB, h.a. e prientemp framm brezhonek arnevez ar Stad-se. E 1977 e tisoc'he an dezrannoù renet abaoe bloavezhioù gant anzav ar fazi hor boa graet o lakaat e oa an hent politikel, ha pa ve dispac'hel, an araez da grouiñ ur vloc'henn vrezhonek. Freuzadur ESB divizet neuze a reas d'un tri c'hard mat eus e izili diskregiñ diouzh an ober. Un hiniannoù a gendalc'has da labourat, ganto da bal izek diorren ar yezh ; dezho eo deuet anat ez eo diorren ar yezh muioc'h eget diorren ar yezh : ar *bount* mut a zo e buhez pep hini, amprouet dre un embreger-damkanañ didruez, a grog da gomz ha da gomz en ul lavar nad eo mui hiniennel hepken met kevredigezhel. Un amveziad lañsus eo kresk herrek niver an dud a vez o vuhezañ an hevelep *bount* e Breizh. En doareoù ma realont ez adkavomp an hentoù dall a voe hon re gwechall, ken a-raok ESB pa oamp broadelourion, ken en avantur ESB — er-maez eus Breizh e welomp an hentoù drastus ma sank pobloù 'zo o sentiñ dall ouzh an hevelep *bount* mut, e Kroatia, e Kosovo da skouer. An dezrannerezh hon eus renet war hon ober e-doug dekvloaziadoù omp e tro da ren bremañ war an oberoù renet en-dro dimp.

Hiziv, met hiziv hepken, e teraouomp bezañ gouest da ren un ober kevredigezhel e daou were : 1. Reiñ d'ar remziadoù nevez an dro da vont en ur brezhoneg a live kempredel war hogos holl dachennoù ar gedvuhez. 2. Diskouez hentoù un dezrannerezh kantrat war an oberoù o tisoc'h diouzh ar *bount*. Mar hon eus tennet kentel eus hon c'hwitadennoù kent ha mar chomomp diegus da embann palioù, da nebeutañ omp barrek da zezvarn sklaer palioù ar re all !

1. Ganimp e tegouezh alies ouzh alies goulennoù a-berzh tud yaouank a-zivout krefen 'zo eus ar yezh pe war boentoù damkanel hon eus pledet ganto. Eskemmoù eus ar seurt zo evel un egin eus an dalc'hioù studi a hetit.

2. E-touez an dud e karg hag an dilennidi ivez e ra ar *bount* e reuz. Darempredoù taer emamp o paouez kaout gant dilennidi eus Finistère. Unan anezho, broadelour brezhon hervez a glevomp, gwalarneger (ezel eus UDB ha perzhiad e *Diwan* eo bet), a venn, dre vezañ keveler d' ar PS, ezel eus Kuzul Meur 29 ha kannad e Paris, “difenn ar brezhoneg” ; ha setu eñ engwezhiet e leviadurezh kulturel ar PS hag ar PCF ; hogen gwir amkan houmañ — se a ouzomp bennozh da deod bresk un amaezhiad eus ar C'huzul Meur — eo “endiguer la déferlante du tout-breton” ; hon Breizhad mat zo kouezhet en trap stignet gant e genstrolladourion a zo diouzh un tu embann emañ deuet

“le printemps de la langue bretonne”¹ ha diouzh an tu all gronnañ o skoaziadoù war marc'h krevet an trefoedoù.

MC a soñj ivez abaoe ur pennadig ez eo deuet poent aozañ “an dalc'hioù labour digor” a rit anv anezho. Chom a ra da spisaat ar framm, an dezvad hag an arc'hwelerezh anezho. Kentañ kudenn : piv a sammo an afer ? Diouzh ar reolenn : d'ar re o deus ur mennoz d' e gas da benn !

¹ “Avec 8 MF d'aides du conseil général, la langue bretonne s'offre « un printemps » salué par la majorité départementale.” *Le Télégramme du Finistère*, 04 02 00.